

**Perrot** (Plouarzel 1877 – Skrignag, 1943).

**Buhez ar Zent**, bet embannet e 1911.

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

War “Embann an Hirwaz“ ne vo nemed sent Vreiz.

### **Sant Konvoion**

Abad Redon (....- 871)

*Pemped devez a viz Genver*

Bremañ ez eus 2000 vloaz, ar vro gaer ma vevom enni, a oa anvet Bro-Arvor. C’hweh vloaz hag hanter-kant a-raog donedigez Or Zalver, Jul Sezar a drehas an Arvoriz hag a lakaas o bro dindan galloud ar Romaned. Pemp kant vloaz goude-ze, poblou gouez an hanternoz, an Alaniz hag ar Zaozon, a zaillas war broiou ar huz-heol : gouenn an Arvoriz a oe flastret hag an Arvor devet (460).

P’en em daolas ar Zaozon da ober euz Breiz-Veur ar pez o-devoa greet euz Bro-Arvor, e oent diarbennet e-pad daou-hant vloaz ; mez o veza ma kreske o niver, kaer a oa stourm outo, ar Vretoned, e-leiz anezo, a lavaras kenavezo da zouar kuñv o havell hag a deuas da zouara war aochou an Arvor.

*Ouz o sturia e veze, meneh hag eskibien,*

*O-devoa kent o bleinet, ouz an enebourien.*

Kenta tra a rejont pa daoljont o zreid war ar horn-douar-mañ, a oe e vadezi : e envel a rejont *Breiz*, ano ar Vro-goz. N’o-devoa degaset ganto nag aour, nag arhant, mez beza o-devoa eur yez pinvidig hag eur feiz virvidig, ha pa veze lemm ar spered ha glan ar galon, a-bouez poania, e teuer atao a-benn d’en em denna.

An nebeud Arvoriz o-devoa gellet tehed a-raog tan ha dir ar ouezidi a zegemeras ar vadiziant, a douezias o gwad gand hini ar Vretoned, hag euz daou rumm tud ma oant, e rejont eur bobl nevez : hini Bretoned Vreiz-Vihan.

Mez abred an dizunvaniez a zavas etrezo, ar pez a roas tro da impalaer Bro-Hall da lakaad o bro da astenn e rouantelez. Ar vez o weled diavêzidi ouz o gouarn a reas dezo en em gleved. D’an 28 a viz Genver 814, Charlez an Impalaer braz a varvas. Raktal ar Vretoned a zavas en o zav, a vannas euz ar vro o mistri hall hag a lakaas Morvan Lez-Breiz<sup>1</sup> ha Gwiomarh, rouaned Vreiz an eil war-lerh egile, a varvas evid harpa gloar ar vro ha divenn douar o havell.

Ar Hallaoued a oa treh.

Er bloaz 826, an impalaer Louis a anvas Nominoë, kont Gwened, da houarner Breiz. Youl Nominoë ‘oa rei lamm da waskerien e vro, mez evid dond gwelloh a-benn euz e daol e kemeras e amzer. Er mare-ze, harzou Breiz ne yeent nemed beteg Gwened ha c’hoaz ar gêr-ze a oa d’ar Hallaoued. Ar vro etre Gwened hag an Naoned a oa eta eun ode digor-kaer d’ar Hallaoued da zialla drezi war ar Vretoned, ha keit ha ma ne vije ket stanket an hent-se ha kaset harzou Breiz beteg ster Redon, Breiz a oa bepred amjestr an traou ganti.

C’hweh beleg, Bretoned o-c’hweh, Konvoion en o fenn, en em gargas euz al labour-ze. Konvoion a oa ganet e Komblesak e fin an eizved kantved. Er bloaz 820 e oa beleget ha Rhaghener, eskob Gwened, a roas dezañ unan euz ar hargou kenta en e eskopti. Mez ar beleg yaouank a roas abred an dilez euz e garg ha gand pemp beleg all ez eas etrezeg ar sav-heol hag o veza en em gavet e Redon, e kavas al leh-se diouz e zorn hag e houlennas digand Ratuili Lesfao, perhenn an douar, aotre da ziazeza eno eur manati (832). Raktal e oe roet dezañ e houlenn. Ar manati-ze, savet gand *Bretoned a bede bemdez evid silvidigez Breiz*, a oa deuet kenkoulz da Nominoë ha ma oa gwelet fall gand ar Hallaoued.

---

<sup>1</sup> Witkar, kannad impalaer Bro-Hall, a deuas eun devez da houlenn digantañ taillou ar Vretoned ha Lez-Breiz a respontas : « Kee dillo da gaoud da vestr, ha lavar dezañ n’emaon ket o chom war e zouar, ha ne fell ket din plega d’e lezennou. » *Nec sua rura colo, nec sua jura volo.*

En amzer-ze (833) an impalaer Louis a oa prizoniet gand e vugale ; Nominoë a gemeras tro ahano evid ober eur bale beteg manati Redon. Dond a rejod da gemenn d'an abad edo letanant an impalaer o hortoz digor e-kichenn an nor-dal. Kerkent Konvoion hag e veneh a yeas d'e ambroug hag a zegemeras anezañ gand lidou kaer. Kalon Nominoë a dride en deiz-se gand al levez : kennerzi a reas servicherien an Aotrou Doue ; en em arbedi a reas d'o fedennou ha prometi a reas ober vad dezo bemdez e-pad e vuhez.

Hag e gomzou ne oent ket goullo, rag rei a reas e leve d'an abati, an douarou m'edo warnañ hag ar re tro war-dro a-dosta, ha dond a eure ker brao a-benn euz an impalaer Louis e-unan, ma stagas hemañ pemp parrez all bennag ouz ar pez a oa roet dija. (30 a viz Eost 836).

Meneh Konvoion a labouras an douarou-ze ; tiegeziou Bretoned a zavas warnezo a-gleiz hag a-zehou : an ode vraz a roe digor d'ar Hallaoued da zaila war Breiz a oa stanket : meneh Redon eo o-devoa greet an taol.

D'a, 20 a viz Even 840, Louis, impalaer ar Hallaoued, a varve. Nominoë, raktal, a zispakas banniel Breiz sonn hag uhel. Mab Louis, ar roue Charlez ar Moal, a hoantaas ober dezañ e bleaga, mez trehet e oe e Ballon e miz Even 845 : harzou Breiz a oa kaset da vad, tre beteg ster Redon.

Nominoë a gasas neuze e vignon Konvoion da Rom gand eur gurunenn aour ha perlez da ginnig en e ano da Leon IV a oa neuze war gador Sant Per.

Eskibien a oa d'an ampoent e Breiz, re Wened, Kemper, Kastell-Paol ha Dol hag ouspenn ma n'oant ket Bretoned, e oa meur a dra all c'hoaz da damall dezo. Nominoë a houlenne ouz ar pab o barn hag o zerri.

Goulenn a reas c'hoaz relegou unan euz ar babed santel a oa bet kurunet o buhez dre ar verzerenti.

Goulenn a ree dreist-oll aotre da zougen kurunenn ha da veza kurunet gand an Iliz evel mestr braz e Breiz.

Ar pab a roas da Nominoë kement a houlenne.

Beteg neuze arheskob Tours en-devoa da weled war eskibien Vreiz ; eskopti Dol a oe greet eun arheskopti anezañ ; ar pevar eskob gall a oe barnet ha torret, hag eskibien vreizad lakaet en o flas ; eskibien Landreger ha Sant-Brieg, eskibien heb eskopti koulz lavared, a oe krouet peb a eskopti dezo, o krenna diwar ar re all tro-war-dro hag evel-se e oe savet *seiz eskopti Breiz*, ha Breiz a oe distaget a-grenn diouz Bro-Hall evid traou ar relijion kenkoulz hag evid an traou all.

Nebeud goude (848), oll bennou braz ar vro en em vodas e Dol hag eno, dirag e bobl, Nominoë a oe kurunet roue war Breiz a-bez<sup>2</sup>. Kalon Konvoion a dleas tridal gand al levez en deiz-se heb mar ebed, rag den n'en-devoa roet an dorn muioh egetañ da Nominoë da zigabestra ar vro.

Nominoë a varvas tri bloaz goude-ze, ha war e varo e houlennas beza sebeliet e Redon (851). Konvoion a douezias e relegou gand e re, ugent vloaz bennag goude ; unanet er vuhez evel m'oant bet, ar maro zoken ne hellas ket lakaad disparti etrezo.

---

<sup>2</sup> Notenn a-berz "Embann an Hirwaz" : hervez istororien on amzer ne deo ket gwir.